

Dornskridoù Milin : Kanaouennnoù

## 37. KURE LOKIREK

Dar sul bleuniou dioc'h ar beure  
 pa zavaz ann aotrou kure  
 ne zonje ket varvje enn deis-se.  
 pa zeo savet, pa zeo gwisket  
 da gas ar sakramant eo et  
 da gas ar sakramant affo  
 da gorn pella euz an drevo,  
 d'eur vroeg devot mar doa er vro,  
 Anna Varvek oa he hano.  
 pa zeo ebarz en ti eet  
 ar sakramant en deuz lekeet  
 war an daol tost d'Anna Varvek,  
 da dal he gwele ez eo eet.  
 - Bonjour, 'mezhan, Anna Varvek,  
 setu deut Jezuz d'ho kwelet,  
 deuet (eo) d'ho kwelet d'ho ti  
 pa n'hellac'h ket mont d'he hini.  
 N'eo ket deut he-unan ama :  
 ar zent, ann elez zo gant ha,  
 Anna Varvek, d'ho pisita.  
 - Pebez gras hoc'h euz, aotrou Kure,  
 pebez gras hoc'h euz digant Doue !  
 dougen Jezuz war ho kaloun,  
 sevel da greac'h huel Rostredour.  
 - Goulennit pardoun 'ta oc'h Doue,  
 kimiadit dioc'h ho pugale  
 /rak neo ket houman hor bro/  
 Sellit etrezeg ann envo  
 rak n'eo ket houman hor bro.  
 Pa hen euz hi komuniet  
 /é tistro da iliz Lokirek  
 da govez he benitantet,  
 da c'hortoz laret 'nn ofern bred.  
 Goude ma oe dek heur skoet  
 da laret 'nn ofern bred eo et.  
 n'en deuz hi ket peurlavaret.  
 War ar respount eo bet kouezet.  
 Sikour en deveuz gouennet  
 digas anezhan er porched  
 Darn a lare oa fatiket  
 ha darn all ez oa marvet.

- 104 -

Maro oa, marvet war iun.  
Biken er bed-ma ne zihun  
Pebez kalounad d'he c'hoar ger,  
a zo er presbital, er ger  
o sira dezhan he vontou ler  
evit mont goude lein da brezeg  
vit mont da brezeg da Wimaek.

VVVVVVV